

8N2-4-018

KANTIK

SANTEZ BARBA E ROSKO

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Al labourer, en he zouarou,
Croumet dindan he veac'hchou,
Digant Barba c'houlen sikour
Hag he bennos var he labour,
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Ar micherou ho tiskuiza,
A gan eur c'hetic da Varba,
Hep en em glem euz he vicher
E kan evel an alc'hueder.

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Astennet gant nerz ar chlenned
Var eur gouele kriz ha kalet,
Ar chlannour e kreiz he boanniou
Dezi a gass he bedennou.

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

III

Santez Barba, dirag Doue,
Bezit sönj euz ho bugale
Diouz ar gurun hon dioualit,
Diouz an tan, ar maro subit.

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Choui zo, en Env. ho patronez !
Dalc'hit ar feiz en ho parres.
Goulennit ma chomomp bepred
Guir Vrettonnet, pennou kalet

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Hon Tud coz ho deuz ho karet
Hag eur chapel deoc'h savet
Ni ho pedo mintin ha noz,
Evit mont holl d'ar Baradoz.

Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba


J.-M. DERRIEN.

Quimper, 8 juillet 1891.

PERMIS D'IMPRIMER :

F. OLLIVIER, Vic Gén.

Morlaix, imp. Le Goaziou



TON ANAVEZET : Kan ar Vartolodet.

DISKAN :

Ni ho salud gant levezenez,
Ni ho salud, hor patronez,
Choui ro d'eomp ho relegou,
Ni ro d'eoc'h hor c'halonou
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba

I

Ar santez ma zo penherez,
Leun a madou, leun a zanvez
Mes he zad a zo eur paen,
Enebour bras d'ar gristen,
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

En he balez an idolou
A reseve kals enoriou.
Mes gant Doue sklerijennet
Barba dezho ne souje ket
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

En despet d'he zad kounaret
Ar verc'h iaouank zo badezet.
Tridal a ra en he frizon,
Seder hag eurus he c'halon :
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba

Diskar ar ra an Idolou,
Ho bruzuna gant he boutou :
Ra vezoc'h dre holl distruijet !
Ha gant an holl dud disprijet !
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Pa vel en he di diskaret
An idolou ganthan savet,
Tad hor zantez ne chel kousket
Ken a vo e verc'h kastizet.
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Evel eur bleiz o iudal
E saillas var Barba raktal,
Dre an drez, ar spern, he stlejas
Ha dindan he dreid he bressas
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba.

O va zad ker, eme Varba,
Ar galloud o peüs d'am laza
Da Jesus, d'he lezen santed,
Me vo fidel betek mervel
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba

Perak, va merc'h, ne sentit ket
Ouz ul lezen am euz douguet,
Ha perak chomp hep adori
Doueou bras Nikomedi
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Biken, biken, n'ho adorin,
Na dirazho ne zaoulinin
Va flijadur a vo diskar
Idolou mud, dall a bouzar
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba

He zad neuze e chadenas,
Da di ar barner e c'hassas,
Evit gallout dre dourmanchou
Mouga buan he c'hredennou
Meulomp leun a joa.
Meulomp Santez Barba.

A barner-ze, pa e guelas
Gant dousser outhi a gomzas:
D'hor lezen doujit a nevez,
Hag o po enor a danvez
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba.

Dalc'hit, dalc'hit oc'h enoriou,
Dalc'hit deoc'h oc'h oll madou,
Mari da Vam, Jesus da Roue,
Setu eno va holl leve.
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Kerkent he c'horf zo dispennet
Gant kribiniou hir ha kalet
Ar verzerez a zo eurus
Da c'houzänv evit he Jesus
Meulomp leun a joa
Meulomp Santez Barba

An tyrant nec'het gant Barba
A roas urs d'he dibenna,
Ar zantez né ra van ebet
Ha d'ar maro dispoint a red.
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

O tra euzus da lavaret.
Ha diez da vea kredet !
Piou zibenno Santez Barba ?
He zad a c'houlen he laza
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Kerkent-he dorset achuet,
An tad kriz a zo kastiset
Eun tarz-kurun, spontuz ha kre
Her purluc'has, abers Doue
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

II

Barba zo karet e peb bro,
Mes sellit ouz parrez Rosko !
He chapel zo huel savet.
Essoc'h d'an holl dud da velet
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Aman an holl a zo dezki,
An holl o deuz fizians ennhi,
Ar buguelik en he gavel,
An den koz o vont da verval.
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Ar martolod ho pesketa,
Laouen a bed Santez Barba,
Hag ar pesket, evel dallet,
En em daol en he roued.
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba.

Pa zichaden an avel foll,
Pa vez danjer e font da goll,
Raktal e c'houlen he skoazel,
Evit gouunit var an avel,
Meulomp leun a joa,
Meulomp Santez Barba

Ar marc'hadour, o veachi,
Bembez en deuz sonj d'he sedi,
Hag e Bro-Saoz, hag e Paris
E tioual tenzor he feiz.